

21

— « O Jeann' d'Ark, eus bar an nenv, mirit da vont da goll,
Hor bro gaer ken dispennet, gant eun avel diroll
A zav terr eus an ifern, dre c'hinou tud direiz,
Evit mouga en hon touez goulouen ar guir feiz.

22

» Ar Groaz a zo diframmet... ha gant peseurt daouarn !
Eus ar skoliou dibater hag eus hol leziou-barn ;
Oh ! roit d'hor bugale karantez 'vit ar Groaz
Hag eur spered a Justiz krenvoc'h eged biskoaz !

23

» Ar beleg n'hell mui, pa gar, tostât ouz ar zoudard,
A vez lavaret d'ezan d'ar Franz beza trubard :
Patronez ar zoudarded, en o c'halon bero
Lakit karantez Jezuz ha karantez ar Vro.

24

» Poulzet gant eur frouden vreïn, eur c'halz a dud yaouank,
Evel anevaled mud a ruilh e kreiz ar fank ;
O guerc'hez glan ha divlam, mirit ar yaouankiz
Var hent ken kaer ar glanded, var hent an honestiz !

25

» Ar Franz eo « Soudard ar C'hrist » adreus ar c'hantvejou,
'Vit e zifenn kalonek eneb an torfejou ;
Grit, en despet da Zatan, ma kendalc'ho hepred
Da zifenn e Iliz sakr e pevâr c'horn ar bed.

26

» Lod o velet o kreski muioc'h-mui ar brezel,
Eleac'h kemer nerz-kalon a baouez da herzel.
O Jeann', en dro d'ho pannel, var dachen an argad
Bodennit ac'hanomp oll 'vit gounit ar stourmad !

27

» Ha neuze leun a fizianz, en despet d'ar bed fall,
Da velet deveziou kaer o lintra var Bro-C'Hall,
E c'hellimp, heb aoun ebed, sevel uhel hor penn
Da zellet dreist hor poaniou hag hon trubuilhou tenn.

28

» Ia, varlerc'h an arne du, varlerc'h an dienez,
E teuio deiz an oabl glaz ha deiz al levenez,
Mar kendalc'homp, en emgann, da zougen ho pannel
Ha d'ho pedi a zevri, o merzerez santel !

29

» D'eoc'h bennoz ha trugarez, enor ha meuleudi,
Oll a unan en eur vouez e kanomp gand dudi,
Da c'hortoz an devez kaer ma zimp d'ar Baradoz
Da gana gant an elez hag ar zent, deiz ha noz ! »

F. G.

IMPRIMATUR : Lambézellec, 8 Aprilis 1909.


A. GADON, Vic. Gén.

Propriété du "Courrier du Finistère", 4, r. du Château, Brest
TOUS DROITS RÉSERVÉS

KANTIK

D'AR

Plac'h Eyurus Jeann' d'Ark



DISKAN



« O Jeann' d'Ark, c'houi a drec'haz ar Zaozon kriz gue - chall,



Hag a ro-az ho pu-ez 'vit daspre-na Bro-C'Hall :



Oh ! kenner-zit ac'hanomp 'vit ma tree'himp, d'hon tro,



Gant e - ne-bou - rien hor Feiz, e - ne-bourien hor Bro ! »

1

Hualet gant ar Zaozon varlerc'h eur brezel hir,
Dispennet ha diwadet gant o c'hlezeier dir,
Kelc'het zoken he c'halon : Bro-C'Hall a venn mervel,
Hag he roue dic'halloud a venn he dilezel...

2

Mes « Doue a gar Bro-C'Hall », Doue en deus truez,
Doue na fell ket d'Ezan e kollfe he buez
Ar vro en deus dibabet evel e verc'h hena...
Doue a zigas Jeann' d'Ark evit he dasprena.

3

E Domremy, el Lorren, e velomp o c'henel,
En eun ti var ar meaziu hag a gerent izel,
Ar plac'hik en deus Doue dibabet a viskoaz
Evit ober en hor bro kalz a vurzudou braz.

4

Grisiennet en eur feiz krenv, he zud a gemer poan
Da lakât en he spered an had a dle diwan'
Ha darevi 'n he c'halon, 'vel eun eost pinvidik,
Dindan glizen ar mintin hag eun heol birvidik.

5

Mes evel m'int tud dister, e kasont o Jeanned
Da vesa var ar meaziu o bandennad denved;
Ha Jeann' etouez he loened, evel eun alc'houeder,
A gas etrezek an nenv he c'hantikou seder...

6

Eun deiz ar plac'h souezet a glev, 'vel eus an nenv,
Moueziu dous evel ar mel hag evelato krenv :
— « O Jeann' d'Ark, taolit eur zell var drubuilhoù Bro-C'hall,
Ha magit an foull start d'he renta dishual... »

7

Hag epad pevar bloavezh, an hevelep Moueziu,
'Vel krenvoc'h krenva bemdez, a zav en he meaziu :
— « O Jeann' d'Ark, savit buhan, reit en han' Doue
Da zigelec'hi Orlean, da zakri ar Roue ! »

8

Jeann' heb argila hirroc'h, e penn eun neubeud tud,
Etouez ar c'hapitened o deus ar muia brud,
A zailh var ger Orlean, a c'hounez ar viktor,
En eur grial a bouez penn ar : « Veni Creator ! »

9

Hag hep koll eun tamm amzer, dougennet gant he feiz,
Jeann' a red 'dreus ar Zaozon da gavout Charlez Seiz,
Hag a lak' an oleo sakr da redek var e benn,
Evit renta er c'hiz-se startoc'h e gurunen.

10

Orlean e deus frankiz... Sakret eo Charlez Seiz...
Jeann' e deus c'hoant da zistroi daved he denved reiz...
Mes an Enebour touet a c'houlén he maro,
Hag en dro d'ezi e sav meur a Judas garo !

11

Setu guerzet d'ar Zaozon, Jeann' ar verc'hez kadarn...
Tamallet da nac'h he feiz eo kaset d'al lez-varn,
Dirak, n'eo ket eur barner, mes kentoc'h eur bourreo,
Hag he barn da ve rostet e kreiz an tan ez-veo.

12

Hep truez ouz he anken, eur goard saoz dinatur
A glask eun deiz er prizoun, pebez ioul hudur !
He zouella d'ar pec'hed, hi ker guerc'h ha ker guen
Hag an erc'h var ar menez pe bleun eul lilien.

13

Ar plac'h yaouank kalonek, dirak traou ken heuzuz,
A ro glanded he ene da ziuall da Jezuz ;
Ha nerzus eneb an drouk hag eneb an dud kriz
A c'hed, he c'halon e peoc'h, pred an tourmant iskiz.

14

E Rouan an tantesiad, gant e deodou tan-flamm,
A zuilh brema gant fulor korf ar verc'hez dinam ;
Hag houma gant eur vouez dous, pell diouz fallgaloni :
— « Va Jezuz, plijet ganeoc'h, d'an dud-ma pardoni ! »

15

Eur ger c'hoaz : Jezuz ! a strink eus he muzellou du,
Hag epad ma kouez he c'horf e poultr hag e ludu,
He ene a nij d'an nenv, — evel eur goulmik venn
Dispaket he diouaskell a nij uz d'an ezenn. —

16

Kerkent, meur a galon saoz a vel o dallentez :
— « Buntet e vimp eus ar Franz, Jeann' a zo eur zantez ! »
Hag e guirionez goude, Bro-C'Hall ouz peb emgann,
Dindan banniel ar « Zantez », a ra eur viktor splann.

17

Abenn pevar pe bemp bloaz, Bro-C'Hall dichadennet
En em zav da c'hloar skedus an amzer dremenet.
Rak Jeann' d'Ark, hep mar ebed, eus lez ar Baradoz,
Varni ha var he armou a daol puilh he bennoz.

18

Ha goulskoude tud difeiz, eneb ar virionez,
O deus nac'het, meur a vech, burzudou hor guerc'hez.
Mes an Iliz he difenn adreus an amzeriou,
Ha Pi Dek he zav hirio betek an aoteriou.

19

Ia, dirag ar Franz kristen, Pi Dek karantezus
A fell d'ezan diskleria guir ar « Plac'h evurus »
Var galon ar Fransizien ha var o fedennou,
Hag he galloud da zelaou mennoz o goulennou.

20

Pedomp eta, Fransizien, ha pedomp gant fizianz,
Ar verc'hez e deus guehall dasprenet hor bro Franz,
Da genderehel d'he diouall, en amzeriou da zont,
Eneb mevelien Satan a zo ken divergont.